

### Ar plac'hik pemp bloas.

Ma no c'heus c'hoant da klevet truez  
Deus diziou d'ar c'hastel nevez.

Da velet krougi a leski  
Brava greg ozac'h zo eni.

Kri e vije ar galon na voelje  
er c'hastel neve an eb a vije.

o klevet eur plac'hik pemp blas  
O discours doc'h ar senechal.

– Otrou Senechal exkusit-hi  
me iel d'ar maro evit-hi

– plac'hik pemp blas kit-hu d'ar ger  
ho mam a iel ive em ber.

Ar plac'hik pemp blas a houlene  
Oc'h e meronez eun deis a voe :

– Va meronez din leveret  
Va mam baour pelec'h eo c'homet ?

– ho mam a zo krouget a losket  
he ludu gant an avel goeñtet.

Ar plac'hik pemp blas a lavare  
De meronez eun deis a voe :

– Ma meronez digassit din eur rochet  
Da kass d'am zad zo e *guinnever*  
Seiz mis zo ne deus ket chenchet.

– Dallit va zad dallit eur rochet  
Seiz mis zo no c'heus ket chenchet.

– Plac'hik pemp blas din leveret  
ho mam baour pelec'h eo chomet ?

– Va mam zo krouget ha losket  
he ludu gant an avel goentet.

– petra an torfet e devez gret  
ma zeo bed krouget a losket ?  
et ludu gant an avel goentet ?

– Daou kraouadur e devoa bed  
hag o daou e deus-hi lac'het  
en jardrin e deus-hi plantet.

Petra ma ie d'ober an dra ze  
me voa beo ag ho ansavje.

Plac'hik pem blas kit-hu dar ger  
Gant aon na chenchfe an avel

Gant aon(1) ne ve an avel a drofe  
Dre doul an alc'hoës o hifamfe.

Itron Varia ar Folgoat  
eman dime eur galonad  
Kouls a beurs mam ag a beurs tad.

Va mam a zo krouget a losket  
he ludu gant an avel goentet.

a va zad zo e gwineve  
nag o trebi gant al lorgnez.

Janneton Puil, 9 juin 1851.

(1) L'n (de aon) écrit en surcharge sur un m.